

Reoliadur diabarzh

Mediaoueg Eugène Gwilhevig Henbont

1. Digoradur

Ar vediaoueg zo ur servij publik get Ti-kêr Henbont.

Ar vediaoueg zo digor da razh an dud.

« Karta al laikelezh er servijoù publik » zo laket da dalviñ er vediaoueg.

Ar vediaoueg a zegas he lod evit an diverrañsoù, ar sevenadur,
evit roiñ titouroù ha degas teulioù d'an holl.

Ar vediaoueg zo ul lec'h kejiñ ha kendiviziñ.

Ar vediaoueg a ginnig a bep sort servijoù :

- lenn levroù, kelaouennoù, selaou CD-où, sellet doc'h DVD-où, gober c'hoarioù... hag o amprestiñ,
- abadennoù ha stummadurioù,
- gober get ostilhoù niverel.

An dud a labour enni a gas kefridioù ar vediaoueg da benn.

Roiñ a raont alioù, kuzulioù ha harpiñ a raont an implijerion.

2. Monet d'ar vediaoueg

- **Frank ha digoust eo monet d'ar vediaoueg evit :**
 - diskuizhiñ,
 - lenn levrou, kelaouennoù ha gober c'hoarioù,
 - kemer perzh en abadennoù hag er stummadurioù,
 - gober get ostilhoù niverel.
- Merket eo an eurioù digoriñ er-maez
hag enlinenn, el lec'hienn internet www.culture-hennebont.bzh
- **Er vediaoueg e vez diwallet ar vugale get o zud bepred
pe get an oadour a zo asabl gete.**

Get un oadour e rank bout ambrouget ar vugale edan 8 vlez.

- Aotreet eo monet a-barzh get bountelloù.

Ar modoù treuzdouden arall (beloioù, troterezioù, botoù-ruilh, plankennoù-ruilh...)

zo da barkiñ er-maez ag ar vediaooueg.

- Al loened, namet ar re a ambroug tud nammet,
a rank gortoz er-maez ag ar vediaooueg.
- Al lec'hioù a-vicher zo evit tud ar vediaooueg hepken.

3. Beviñ a-gevret

- **Ar vediaoueg zo ul lec'h boutin.**
Gelliñ a ra an dud dont di da sipiñ o spered pe da ziskuizhiñ.
- Pellgomz ha gober pellemvodoù
a ranker gober er-maez ag ar vediaoueg.
- Difennet eo butuniñ pe burezhat er vediaoueg, àr an teras siken.
- An implijerion a rank diwall o aferioù personel.

- **Difennet eo bout diseven get tud ar vediaoueg hag an implijerion.**
Ar rustaj verbel ha fizikel zo difennet.
- Gwir o dez an implijerion da eztaoliñ o c'hredennoù.
get ma vo graet hep trubuilhiñ an urzh foran.
- An difraeerezh, ar werzh, an dasparzh brudfollennoù hag ar bruderezh zo difennet.
- Aotreet eo skritelliñ àr ar banell er-maez ag ar vediaoueg.

- **Doujañs zo deleet er vediaoueg evit mad an holl.**

Taolit evezh doc'h an objedoù hag al lec'hioù mar plij.

Mar bez gwastet dafar get un implijour e vo faturennet priz an dafar dezhoñ.

- Ne c'hell an implijerion evet ha debriñ namet àr an teras pe pa vez abadennoù.

Gelliñ a reer evet get ma vo taolet evezh doc'h an dafar.

- Rekis eo doujiñ d'ar c'hemennoù surentez.

- Rekis eo endevout aotre tud ar vediaoueg evit :

- an atersadennoù, tenniñ luc'hskeudennoù ha filmiñ,
- skigniñ sonenrolladennoù,
- luc'heiliñ levroù ha kelaouennoù,
- eiladuriñ CD-où ha DVD-où.

4. Amprestiñ

- Rekis eo bout ezel evit gelliñ amprestiñ objedoù (levroù, kelaouennoù, CD-où, DVD-où...).
- Titouroù àr an emzeladur digoust hag ar prizioù emezeliñ a c'heller kavout en degemer hag enlinenn, el lec'hienn internet www.culture-hennebont.bzh
- An titouroù personel evit emezeliñ a vez dastumet hervez ar Reoliadur hollek àr gwarez ar roadennoù (RHGR).
- Evit kement priz digresket e ranker diskouez ur brouenn.

- N'hell ket priz an emezeladur bout daskoret.
- **An izili a rank doujiñ d'ar badelezh amprestiñ.**
- **Mar bez gwastet un objed get un ezel e ranko degas unan hañval en e lec'h.**
- **Ma ne vez ket rentet an objed get an ezel e vo faturennet dezhoñ
hag un dell-gastiz en do.**

5. Kemer perzh en abadennoù hag er stummadurioù

- **An abadennoù hag ar stummadurioù zo digor d'an holl.**

Lakat e anv a c'hell bout rekis.

Un oad termen a c'hell bout laket.

Ur paeamant a c'heller goulenn evit kemer perzh.

- Ar pellgomzerioù a rank bout laket e morgousk.
- Doujiñ a ra ar berzhidi komzoù ha soñjoù an holl.

6. Gober get an ostilhoù niverel

- Implij ostilhoù niverel (urzhiataerioù ha letrinoù c'hoari) a c'hell bout graet get an holl.
- **Rekis eo doujiñ da reolennoù ar c'horn niverel :**
 - termenet eo ar badelezh implij,
 - difennet eo sellet doc'h lod ag al lec'hiennoù Internet,
 - Un oad termen a c'hell bout laket,
 - termenet eo ar pellgargiñ.

Ar reolennoù-se zo skritellet er c'horn niverel.

7. Lakat ar reoliadur diabarzh da dalviñ

Razh implijerion ar vediaoueg a rank doujiñ d'ar reoliadur diabarzh.

Tud ar vediaoueg a daol evezh ma vo doujet d'ar reoliadur diabarzh.

**Mar bez torret ar reoliadur diabarzh get un implijour,
e c'hello bout skarzhet a servijoù ar vediaoueg,
evit ur prantad pe da viken.**

N'hello ket priz an emezeladur bout daskoret dezhoñ.

Ar reoliadur diabarzh a c'heller kavout :

- enlinenn, el lec'hienn internet www.culture-hennebont.bzh
- e stumm paper en degemer.

Reoliadur diabarzh ar vediaoueg zo bet aprouet

get kuzul-kêr Henbont

d'ar Yaou 26 a viz Gouel-Mikael 2023.



Savet eo an teul-mañ e brezhoneg aes.